

KANAOUEN^T BUGEL DIRINON,

YANN MALLEJAC,

KOURSER BRUDET DRE-HOLL HA DEN A SKOUER VAT E PEP FESON.

=====

-I-

E Dirinon ez eo ganet,
Kichen Landerne, Finister;
Yaouankik c'hoaz eo bet kaset
Da borz Brest war e vicher.

Sko! sko! sko! va zammig aotrou,
War an anne gant morzoliou!

-II-

Tro-war-dro, e-pad ar goueliou,
Yann Mallejac en deus poaniet,
Da heulia deiz ar pardonioù
Kourcherien Vreiz dija brudet.

Red! red! red! desker veloioù,
Gra da gof-kar war 'r pedaliou!

-III-

Tremenet gantañ e zervij,
E kuita porz Brest 'vit redek,
Koulz e Breiz e-giz e Pariz,
Evit gonit koursioù priziak.

Red! red! red! paotr ar pedaliou,
Gant da ziou rod war an hentchou!

-IV-

Pa vez skuiz bras war an hentchou,
War mêzioù bro ar C'hreizteiz,
Gant paotred kreñv war e roudou,
E soñj er c'hrampouez a vro Vreiz...

Red! red! red! paotr ar pedaliou,
Kendalc'h, mabig, barz ar c'hoursioù!

-V-

Kerkent, enep nerz an avel,
Poueza ra war ar pedaliou,
Nijel ra evel er sparfell,
Koulz war tergen ha plenennou.

Red! red! red! paotr ar pedaliou,
Bez war evez er c'herniel-trol

oo

War don: "Ar Pilhaouer"

-VI-

Goustad, paotred an Itali,
Paotred Beljik ha kemend-all:
YANN MALLEJAC ro deoc'h ali
Da espern nerz benn eur wech all!!

Red! red! red! mestr ar pedaliou,
Had anezo en da roudou!

-VII-

Atao war wellât za va den:
Tro Frañs n'eus grêt diou wech dija;
Fiziañs n'eus en e steredenn,
En deirvet gwech vo er c'henta!

RED! RED! RED! ROUE AR PEDALIOU!
GWIR VREIZAD YAC'H EN HOLL VROIOU!

